


KANTIK DA ZANT ROCH.

Ton : Neb a gar beva fur hag curuz.



Diskan.

Sant **ROCH**, patron meurbed gallouduz
 Euz an dud klan hag ankeniet,
 Pedit hor Zalver trugarezuz
 D'hor miret oll diouz peb klenvet.

1.

Diskennet euz eul lignez huel,
 E rannit d'ar paour ho tanvez,
 Evit gallout bevan ha mervel
 En dienez, er baourentez.

Sant ROCH, patron etc.

2.

Redeg a rit da zikour keryou,
 Spouronet oll gant ar voçen ;
 En peb karter e rit burzudou,
 E tennit an oll a anken.

Sant ROCH, patron etc.

3.

Soulaji a rit gant madelez
Ar glanvourien guez dilezet :
Ho pedennoù hag ho santelez
En peb lec'h a voug ar c'hlenvet.

Sant ROCH, patron etc.

4.

'Vit ho nessa c'hui offr ho pue ;
Kalz a zeu d'ho tiguemeret
Evel eun Æl deut aberz Doue ,
Da zouten an dud trubuillet.

Sant ROCH, patron etc.

5.

Breman c'hoas euz a lein an êvou ,
Gant ar garantez ar vrassa ,
E vouguit krenn en kalz a vroyou
Ar voçen hag ar c'holera.

Sant ROCH, patron etc.

6.

C'hui er goar, patron karantezuz,
Hor pec'hejou, hor goal vue,
A denn var n'homp klenvejou spontuz :
Grit ma tistroimp ouz Doue.

Sant ROCH, patron etc.

7.

Sant ROCH, skuer euz an oll vertuziou,
Grit ma kuitaïmp ar pec'het,
Ha ma c'heuilimp oll hoc'h exemplou,
'Vit ma vimp en ênv kurunet.

Sant ROCH, patron etc.

DIVEZ.

An aotrou'n Escop a aotre ar c'hantik-man
hag a ro daou-uguent devez induljansou da gue-
ment-hini er c'hano gant devocon.

Sant Brieç, ar 14 a viz guengolo 1867.

OLLIVIER, Vik.-gen.



A zo permetet da voulla,

En Kemper, ar 4 a viz here 1867.

EVRRARD, Vik.-gen.



E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr. ru ar Pave.